



Cantic Spirituel en enor d'an Itron Varia ar Porzou

Pehini a ra cals a Viraclou er Castel-Nevez

Var ton : *O Tad, ô Mab, ô Speret Glàn*

Me a garre e Guerc'hes Vari,
Galloud cresqui ho meuleudy,
Hag e pep calon angravy
An hano JESUS ha MARI.

Pet den a so er Barados
Joayus, eürus deiz a nos,
Pere pend e sicour MARI,
A vizie en tan o lesqui.

Pet den siouas a zo daounet,
Hac a al-se besa salvet,
Mar carzen pedy a galon
MARI hon Mam hac hon Itron.

Hag yves Euzen ar Cornec
A Pares Guiscrif assuret
Epad teir sizun ezo bet
Hep gallout ober eur gamet.

Gret mat eo assur bisita
Chapelou n'Intron VARIA,
Gant guir Feiz ha devotion
Evit gallout caoüet pardon.

En em gouestlas en deus gret
D'ar Verc'hes Sacr ha biniguet,
Hag en deues bet ar yec'het ;
Chetu Miraclou bras meurbet.

MARI ra cals a Viraclou
Er Chapel hanvet ar Porzou,
Tostic d'ar Castel-Neve,
Pa ze permission Doue.

A Pares Edern ententet
Yves Louïs al Louedec
En devoa collet ar guelet,
Allas ! ne wele lom e bet.

Evit ma vezz inspiret
Cals emeus a Pelerinet.
Da visita ar Chapel-se,
E rapportin darn a neze.

D'ar Porzou er C'hastel-Neves
En deus en em gouestet yves,
Hac en deus bet ar guelet
Digant ar Verc'hes viniguet.

Eun den dign d'a vezout credet
En danger da veza beuzet,
Er mor tostic da Venodet,
A so bet ganti recouret.

A Pares ar C'hastel-Neves,
Frances ar Ros ez eo hanvet,
Eur croüadur yaouané meupbet,
Biscoas n'en devoa bet querset,
Er Porzou en deus bet remet.

O veza prest da gonfonti
Em vouestlas a galon dezi,
O prometti mont d'ar Porzou
O gouzout-se re Miraclou.

C'hoas er gueara Castel-Neves
Eur croüadur yaouanc yves,
En devoa collet ar querset,
D'ar Porzou eoa douguet.

He pried clan hag affliget,
He gant medicin dilezet,
D'ar Porzou en em vouestlas,
Ha souden yec'het e cavas.

Goude beza bet er Chapel,
Ez eo disouget d'ar feunteun,
Hac en deues bet ar querset
Dirac an oll assistantet.

Beza ezoa diou vreg vrases
Ebars er Guer a Vontroules,
Pere o vesa poaniet bras,
Da vont d'a Porzou en em vouestlas.

Francesa ar Bris, a Quarahes,
En deues disceriet yves,
Eur gar dezi a voa breinet
Percluses voa en em rentet.

En em recommandi e deus gret
Da Vam hor Zalver biniguet,
Hag e deuz bet ar yec'het,
Meulomp hor Zalver biniguet.

Euz ar gueur a Castel-Nevez
E voa eur voulc'hises yves,
Quen terrubl oa incommodet
Ma devoa collet ar c'herzet.

D'an itron VARIA ar Porzou
He deus offret e fedennou,
Ar feunteun yves bisitet,
Neuze souden or soulaget.

Daou grouadur eus a Gourin,
Unan oa clan gant ar derzien,
Un all ne alle quet querzet,
Er Porzou o deus bet remed.

Hag yves Ezen ar Boudet,
Euz a parrez Sant Hernin,
E devoa collet ar c'herzet,
Meurbet e oa incommodet.

Ebars e chapel ar Porzou
En deuz gret e bedennou,
Hag er feunteun en em goele'het,
Neuze en deuz bet ar c'herzet.

Quer buan e voent delivret,
Hag o veza bet dispoaniet,
Donet a rezont ar Porzou,
Da renta joaus ho vœvou.

Her C'hastel-Nevez e crogas
Ebars ar goal eun tan bras,
An ty tosta a oa goe-tlet
D'ar Porzou eur plaç biniguet.

Incontinant e oa mouguet
An tan, ha flammou diremed ;
Chetu, pec'her bras, Miraclou
A rer e Chapel ar Porzou.

Eun nosvez eun ozac'ha Las,
Er C'hastel-Nevez a couezas
Diwar ar pont en eun dour bras,
Miracl a oa pa ne veuzas.

Cria a re : « Guerc'hes VARI,
Ma recouret, me ho suppli, »
En instant e oa preservec
Hag emeuz ar rivier stleget.

Eun c'hrouadur a oa couezet
En eur punç, hag eno lezet,
A het tri deiz zo preservec
Dre voyen MARI biniguet.

Eun all epad teir heur antier
O veza beuzet en eur ster,
Ato bet recouret salo,
Hag a dleye beza maro.

Piou eo na vel breman scler,
Ar miraclou bras ha caër
A ra Verc'hes dre graç Done
Ar Porzou er C'hastel-Nevez.

It oll eta a vandennou
Da Chapel devot ar Porzou,
Da implori gant guir fianç
He zicour hag he assistanç.

Eur C'hapucin eus ar Pares,
Eun leve dre he vadelez,
Roet Relegou a bemp Sant,
Hag eus eur Santez a present.

Da gresqui an devotion
En andret MARI, hon Itron ;
Rac ma zeo gwir Advocadez
Evit an oll bec'herien quæz.

Itron VARIA ar Porzou,
Obtenit deomp ar graçou,
Da alloud nem gonvertissa,
Ma hellimp guell ho servicha.

Er miz Eost, er Zul diveza,
Emedi he Fardon brassa :
Deuet oll gant devotion
Da c'hounit ar remissien.

C'houi zo Itron ar guelou mad,
Ho recommandit oll d'hon Tad,
Ha suppliet ho Mab JESUS,
D'or renta da jamez eurus.

Hon Autrou Person en deus bet,
Evit an oll Belevinet,
Emeus a Rom eur Jubile,
Pehini a bado tri de.

AMEN

